



## Trouz ul loen

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Evit piv ?

un 20 bennak :

deskiñ ur ganaouenn « bet on bet e foar ... » pe « dilun vintin ez in d'ar foar ... » evit ma anavezfe ar vugale trouz loen-mañ-loen.

### Pal ar c'hoari

heñvelaat trouz ul loen en ur anavezout e anv.

### Doare da c'hoari

ober ur c'helc'h ar vugale en o sav.

Rener ar c'hoari `zo e-kreiz gant ur volotenn.

Stlepel a ra ar volotenn d'ur bugel bennak en ur c'houlenn digantañ :

- « penaos e ra ar pemoc'h ? » da skouer ;

en ur dapout ar volotenn, ar bugel goulennataet en deus da respont :

- « oc'h, oc'h e ra ar pemoc'h »

### Doare all da c'hoari

evit ar re goshoc'h, e vo goulennet gant rener ar c'hoari :

« petra `ra ar c'hazh ? »

hag egile en do da respont :

« miaoual a ra ar c'hazh »